

Garnizon Lannuon



Kreiz-kêr Lannuon

Seitek devezh ha triwec'h miz
E garnizon Lannuon
Oa aet an Aotrou da Baris
E garnizon, digedondon
E garnizon Lannuon

A-benn pa zistroio d'ar gêr
'Vo cheñchamant 'barzh ar maner

«Cheñchamant zo er maner-mañ
Ha ma Itron, pelec'h emañ ?»

- «Mañ 'us e kambr an uhellañ
'Tommañ he mab an terriplañ

Ur paotr bihan glas e lagad
Ne oar ket piv ez eo e dad

E dad ne oar ket piv ez eo
M'hen dar' ar miliner e ve»

«Diboñjour dit 'ta miliner
Me zo deut da glask da gomper.»

- «O ! da gomper me ne yin ket
Kar ma milin zo war he bleud.

Kar ma milin zo war he bord,
Hag aon am eus e vefe tort.»

- «O ! artizaned zo er vro
Ma vefe tort - int a renko.

Me ouie mat 'ta miliner
'C'hellez ket bet tad ha komper!»